

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

63. (DIGOUVI AN AMOUROUZ)

Debonjour deoc'h va mestrez plijadur va spered
 ha p'ho kwelan dirazhon ganeoc'h me zo charmet
 o welet ho kened me am euz plijadur
 ho komzou a zo charmant ken dous hag ar mel pur
 Eul labouz zo em jardin a gan dioc'h ar mintin
 en deuz din me lavaret ez oac'h eur plac'hik fur
 en deuz din me lavaret ez oac'h hu dimezet
 ne greden ket va mestrez hag ounn deut da welet
 me zo eur vinorez iaouank n'em euz na mam na tad
 na nikun euz va lignez hag a garre va mad
 c'houi a zo eun den iaouank o poursu ho studi
 pa vezo ho polontez c'houi gavo ho faltazi
 kaout a ran c'hoaz a gredan n'oun ket gant an holl kase-
 Laket em oa va fizianz enn hoc'h va mestrez kear et
 Laket em oa va fizianz va inklinasion
 ha nemet var ho refus ne rannin va c'haloun
 roit din eta va mestrezik roet din va mouchouer
 a zo ganeoc'h oc'h orren e kornik oc'h armel
 da zec'ha va daelou pa viot dimezet
 evidon me va mestrez sav° n'ho kenstagen ket °Kompreñ
 me zo eur vinorez iaouank a barrez guiseni moarvat :
 ne fell ket d'am lignez e teufen da zimezi salv
 er bla ne zimezin na birviken jamez
 dezir am euz em c'haloun da vond da leanez
 penaoz ta va mestrezik tor braz a reac'h ouzin
 ne roaz din va digouvi pa n'o poa santimant din
 ne roac'h din va digouvi diouzoc'h pa c'houlennen
 e vijen ket enn irvoud ho koude evallen
 adieu ° va mestrezik adieu a lavarann ° A-us : ta
 evit mont da verdead inkontinant ez ann
 Me pen em euz gallet donet d'ho tecevi° ° = décider
 birviken e plac'h iaouank me ne fisin mui sell. ouzh:
 dezo, a oa
 devez e br.
 krenn.

VVVVVVVVVV